



SANTIMANTCHOU DIVEZA

AN AUTROU BRANELLEC,

CURE EUS A GASTEL-PAOL,

DIBENNET ER REVOLUTION,

HA COMPOSET GANTAN E-UNAN.

Var ton : *Sanctorum meritis.*

D^OUGUET eo an arrêt,
Ne zeus mui a dermen ;
Da choas eo din ròet
▲ zaou gant al lezen ,
Pe renonç d'ar feiz ,
Pe beza dibennet :
O divis cruel ha calet !

Me a choas ar maro
Eus a greiz va c'halon ,

Ha sur a brefero
 Ar güir Relijion
 Da heuill lezen impi
 Un doctrin ampoezon,
 Sourcen eus a berdition.

Va c'hrim ha va zorfet
 Dirac an Nation,
 Eo ma meus prezeguet
 An Aviel güirion,
 Condaonet al lezen
 Emeus a chismatiq,
 Hac ouspen eus a heritiq.

Ne brezeguen netra
 Na d'oa güir gristen,
 Gant va goad er sinan
 Me er rayo laouen.
 Ia, eur poezon eo
 Hac eur poezon mortel
 A ro ar maro eternel.

Pobl dign eus a druez,
 Eur vech c'hoas qent mervel,
 Quitta da zallentez,
 Dalc'h mat d'an Aviel.
 Malheur, mil guech malheur
 D'an neb n'en heulio qet,
 Rac assur e vezø collet.

Digor da zaoulagad,
Crén gant spont hac horrol,
Me a ya gant va goad
Da zisquez da errol.
Ia , evit va feiz ,
Souten ar virionez ,
Tud direiz , me ro va buez.

Lavar c'hoas , mar qerez ,
Den ingrat ha barbar ,
E zeo var digarez
Caout madou an douar
E meus het refuset
Dont da bresta sermant ,
Ha soufr qement all a dourmant.

Mes perac , va Jesus ,
En em justisia
Dirac tud maleurus ,
Tud ar re injusta ?
Heritiqet direiz
A zistruch gant arrach
An Ilis hac ar gristenach.

Selaou , te , breur ingrat ,
Breur impi , infidel ;
Crial a ra va goad
Evel hini Abel
Venjanç en da henep ,

Heneb da gruote ,
Hac heneb da impiete.

Breur criz ha dinatur ,
Ha te ell c'hoas souten
Un doctrin qen impur
Ha quer cruel lezen ?
Ret e vez possedet ,
Mar. d'ez c'hoas da heulia
Tirantet a deu d'am laza.

Eur vech c'hoas , va breur quer ,
Saveta da ene ;
Heuill Ilis hor Zalver ,
Ha renonç pront d'as le ,
Sourcen eus da valeur
Ha da zaonation
Ha maleur oll bobl ar c'hanton.

Pet mil a eneour
Oc'h eus dija collet
Dre ho coal exemplou ,
Te ha da gonsortet !
Touerien maleurus ,
Partout e rit brezel
Da Jesus , d'e Ilis Santel.

Eur vech abandonet
Gant ho craç , va Doue ,
Evel dour vez evet

Pep seurt iniqite.
Erruet en abim
Ar pec'her caledet,
Pet crim zo gantàù coumettet !

Sclerrait o daoulagad,
Va Doue , d'ar re dall ;
En faveur ar re vad ,
Pardonit d'ar re fall ;
Laqit , mar plich ganeoc'h ,
Mar dê ho madelez ,
Ar peoc'h en hon Rouantelez.

Gant ho craç , va Jesus ,
Me anduro laouen
Peb seurt poanniou grevus ,
Arrach va bourrevien.
Me varvo en Ilis :
Va c'horf a berisso ;
Mes va feiz sur a driompho.

Ra zeuyo va maro ,
Va Zalver , va Doue ,
Da rey ar peoc'h d'am bro
Hac an dranqilite ;
Ma vezo hoc'h hano ,
Qeit all zo blasfemet ,
E peb bro meulet , adoret .

Ia , sur , va Doue ,
 Me a ra volontier
 Eus va c'horf , va bue ,
 Eur sacrific antier :
 Bezit deoc'h agreabl ,
 Pardon , me ho ped ,
 Tud coupabl ha direolet.

Va brassa calonad
 O quittat ar bed-mâ ,
 Eo ma voar qen ingrat
 Nac evit castiza
 Va mad-oberourien ,
 Va brassa mignonet ,
 Balamour m'o deus va lojet.

Courach , patientet ,
 Intanves , minor paour ,
 Doue'n deus prometet
 Vit ur verennat dour
 Roet en e hano ,
 Recompanç eternel ,
 Hac ho pezo goude mervel.

Adieu , pobl a Gastel ,
 Va fenitantet qeiz ,
 Bezit atao fidet
 Ha dalc'bit mat d'ar feiz .
 Neb a goll e vuez

Balamour da Zoue

Certenament e savete.

Adieu , va breur Guillou ,
 Adieu , va breur Biel ,
 Arretit ho taelou :
 Er Religion Santel
 E qefot motivou .
 A gonsolation :
 Heullit-y a greiz ho calon.

Va breudeur Bêleyen ,
 Na gollit qet courach ;
 Labourit da zouten
 En Franç ar gristenach :
 Da c'hounit un ene
 Disprijit ar maro ,
 Ha Doue ho recompanço.

Va breudeur Bêleyen ,
 Nevez merzeriet ,
 O deus o c'hurunen
 Sur en ên recevet :
 Me ho ped , va Jesus ,
 Da rei din o c'hourach ,
 M'am bezo ar memes partach.

Evel ar Vadalen ,
 Dirazoc'h prosternet ,
 Gant glac'har hac anqen ,

Me a vouel va fec'het,
Va Doue ! pardonit,
Ha na zisprijit qet
Eur galon humbl ha contristet.

Erruet eo eta :
Ar fin eus va exil !
Quittat a ràn gant joa
Ar bed leun a beril,
Evit antren er gloar
En deus Doue prometet
D'an neb o d'o perseveret.

O deves dudius,
A laouenediguez !
Mont da gaout va Jesus
En e rouantelez !
Beza en un instant
Gantâ er Barados ,
Eternellamant o repos !



E Montroulez , e ty LÉDAN , e traon ru ar Vur.